


# **EMSAV**



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 2 - C'hwevrer 1967

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanantoù e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - Rennes

C.C.P. RENNES 2 460 10

---

Pennskrivagner : Youenn OLIER

---

T a o l e n n

Meizad ur Stad Vrezhon .....	p. 3
Hag-eñ ez eus ur sevenadur brezhon ? .....	p. 5
Meven MORDIERN .....	p. 7
Notennoù armerzhel (2) .....	p. 12
Lennadennoù .....	p. 16

## MEIZAD UR STAD VREZHON

Pal an emsav, an dra-se a oar an holl, a zo bet a-viskoazh savidigezh ur Stad Vrezhon e stumm pe stumm. Moarvat, abaoe derou ar c'hantved-mañ, eo bet komprenet e ranke pobl Vreizh adsevel ur Stad bennak anez bezañ barnet da vont da get. Meizet eo bet ar Stad-se e meur a zoare, daoust ma anzave an holl re a erbede ar savidigezh anezhi ne c'helled ket ... tremen hepti. Peurvuiañ e oa renet ar stourmerion gant o spontoù hag o rakvarnioù pa glaskent termeniñ ar Stad-se. Da skouer, pa ginnigent ur Stad sujet da Vro-C'hall, hep perzhioù gwirion ur Stad, e oant renet gant ar soñj e oa ret didaeriñ ar pennadurezhioù gall ha gonit o madelezh evit ma asantfent dre gaer reiñ o goulenn d'ar Vrezhoned. A-wechoù all e tiazezent o goulennoù war ul lezennelouriezh aet e-maez a c'hiz. Etre an daou vrezel, da skouer, e raed kalz a reuz endr. da feur-emglev 1532, e giz p'en dije bet hemañ un dalvoudegezh bennak, diazezet ha ma oa bet da heulundrouziwezh soudardel dieiltro. Lod all, zoken, a nac'he resizañ e nep doare, koulz lavaret, bevennoù ar Stad a oa ezhomm anezhi gant ma vije bet goulennet en anv ar "vroadelouriezh" e vije bet mat atav. Dre vras e oad techet en amzer-se da grediñ e c'helle ar vroad end-eeun bezañ distag diouzh ar Stad.

Eno, dres, edo ar fazi. Daoust maz eo bet graet broad Vreizh gant an istor n'eo ket diazezet he gwirioù war an istor, na war ar gwir, etrevroadel pe get. Adal ma anzaver ez eus ur vroad vrezhon hag he deus ar gwir da vevañ eo e tegemerer war un dro ivez e tle kaout kement perzh he deus ezhomm ur vroad evit bevañ e gwirionez, da lavarout ur Stad vroadel pe ma karer ur Stad klok.

Ar Stad e gwirionnez n'eo nemet ar vroad hec'h unan, he buhez, ha n'eus diforc'h ebet etre ar Stad ha buhez ar vroad. Kement a zo graet adal bremañ abenn ad-sevel ar sevenadur da skouer, a denn ivez war un dro da grouiñ ur framm stadel.

Ur vroad a zo da gentañ ur gumuniezh ha n'eus kumuniezh ebet hep urzhiadur nag ere start etre an izili anezhi, pe kentoc'h hep framm a c'hell aotren d'ar bobl dibab hec'h hent e giz aa kar. Pa implijer ar ger framm e inteter ar meroz e tle ar bobl mirout an intrudu da reiñ d'he buhez al liv a zerec outi. Hogen merkañ a ra ivez un disrann krenn diouzh ar frammoù estren a vir ouzh pobl Vreizh end-eeun da embreger he frankiz. E gerioù all, ne c'heller meizañ Stad Vrezhon ebet, nemet dishual e ve.

Dishualded diavaez koulz ha dishualded diabarzh. Da lavarout eo ne c'hell ket ar Stad Vrezhon dileuriañ ur rumm eus ar bobl, hogen ar bobl a-bezh. E roll eo bezañ tredeog etre al luskadoù a zo o labourat e diabarzh ar bobl hag a denn, dre genc'hoari etrezo, da stummañ tonkadur ar vroad. E roll eo eta gwareziñ an ensavadurioù politikel a aotreo da bobl Vreizh dibab hec'h hent. Un diforc'h a zleo bezañ atav eta etre ar Stad hag ar gouarnamant, roll ar Stad o vezañ gwareziñ frankiz diavaez ha diabarzh ar bobl.

Ha dav eo ansav n'eo ket reizh an emgavioù dispac'hel, pezh a c'hell an holl kompren, hogen n'eo ket Breizhiz a zo da damall evit an emgav-se, met ar re a wask hor bro. Ar Stad a c'hoanagomp eta ez eo ar reizhaed, ar rezid evit ar vro, da lavarout eo goudor ur Stad Vrezhon. Arabat eta d'an emsav ankounac'haat e kas d'ur pal stadel anez en em gemer evit un dra padus e istor ur vro ha dihentañ diouzh ar preder yac'n.

Al labourioù kaset da benn gant an emsav, evel unvanidigezh ar yezh, savidigezh ur yezh lennek pe krouidigezh ul lennegezh arnevez, n'int nemet derou ur sevenadur nevez a zo o vont da vleuniañ e Breizh. Ar re a fell dezho hiziv kemer o renk en emsav evit kaout o flas warc'hoazh er Stad Vrezhon a zo dleet dezho ivez gouzout ez int lodek adal bremañ er sevenadur a zisoc'ho diouzh dasorc'h ar vro-mañ.

M E V E N M O R D I E R N

René LE ROUX, - Meven MORDIERN diouzh e anv a emsaver, - a voe ganet e Bordeaux e 1878, eus un tiegezh gall a veajourion hag a ergerzhourion. Bevañ a reas e bro e aud, e-kichen Vendôme, hag e Paris betek 1920. Eus 1920 betek e varv e 1949 e vevas e Sant-Helori, e kichen Pordig (Goueloù). Mervel a reas en ospital Kintin en dienez.

Peadra e diegezh a roas dezhañ an tu da dremen hep kemer labour-bevañs ebet ha da reiñ e holl amzer d'ar studi. Heñchet gant e vamm war-du ar geltiegouriezh, e teuas buan da studi ar brezhoneg, peogwir e teskas ar yezh etre e 13t hag e 17t bloaz. Betek an oad a 42 vloaz e heulias e Paris kentelioù ar Skolioù-Meur war gement skiant an natur hag an den a veze kelennet eno. "Biskoazh n'en deus klasket dont da vestr war nikan eus an tachennoù pleustret gantañ. Ned eo ket aet kennebeut d'ur beajour bràs, d'un dizoloadenner-broioù, evel ma hete dezhañ e vamm. Staget gantañ da zeskiñ ar brezhoneg, n'en deus bet diwar neuze ken pal en e vuhez nemet labourat evit ur yezh a seblantas dezhañ bezañ ken gwerc'h ha ken difraost ha n'eus forzh pe vro nevez-dizoloet. Ober eus ur yezh-pobl o vont e bruzhun rannyezhoù ur yezh sevenadurel, setu da betra e ouestlas e vuhez hag e strivadennoù"(1).

Meven MORDIERN hag ar brezhoneg

Deuet eo Meven MORDIERN d'an Emsav dre studiant ar Gelted kozh. Displegañ a ra e-unan an hent espar e voe e hini : "dre gas va buhez o lenn levrioù skrivet gant gouizieion, em eus tapet begadoù uhelzeskadur-

ezh a zo bet din eus an talvoudusañ, rak i eo o deus va lakaet da chom peget-start ouzh ar rezhoneg a-hed hanterkant vloaz hag ouzhpenn, daoust d'an holl ziaesterioù a oa war va hent, me galleger ganet ()"(2).

ent bezañ ur yezh eus hon amzer e voe evitañ ar Brezhoneg yezh "Brezhoneg ar 1<sup>añ</sup> - 10<sup>t</sup> kent H.S., () brientinon, uhelidi, pennoù-pobl ha pennoù-kredenn, brezelourion, disaouzan, trec'hourion ha faezhourion ()"(3). Ar brezhoneg zo ennañ muioc'h a zanvez eget en darnvuiañ eus yezhoù all Europa; ur yezh veur a sevenadurezh e tle bezañ en-dro. Hag e gwir, pa gomze Meven MORDIERN eus stad truezus ar yezh hag eus an digasted vezhus a ziskouez outi bourc'hizion ha renkadoù pinvidik Breizh, ez a en egar : "Ar Brezhoneg ? Eñ eo e gwirionez Tavanteg meur ar Vro. Ha koulskoude eñ eo an Dra Veur er vro-mañ, dreist an Iliz, koshoc'h egeti, klodveurekoc'h egeti dre vraster e amzer-dremenet. Rak eñ eo ar Ramz trimilvloaziek, stumm bremañ ar yezh veur komzet gant ar vrenined o deus kabestret dre nerzh o armoù Europa hogos en he fezh e-pad ar c'hentañ milved kent H.S. Eñ eo an Dra Hirbad, dreist d'an dud en komz pe a dlefe en komz, ne dint en e gichen nemet kornandoned berrbad. N'eo ket evidon, evel m'emañ evit "aotrounez" ar vro-mañ, ur yezh trefoet komzet gant ur bern kramenneion dizesk diwar ar ploue" (4).

#### Obererenn vMeven MORDIERN

"E 1891-1895 eo am eus desket ar Brezhoneg, hag eus 1891 da 1920 ne'm eus ket lezet un devezh da dremen hep lenn hag adlenn pajennoù brezhonek e-pad un eurvezh da vihanañ"(5). Petore brezhoneg a lenne avat ? "Brezhonegoù a bep seurt, aliesoc'h fall eget mat, brezhonegoù distreset, koueriadekaet, gwerinekaet,

gallekaet, h.a. Er yezhoù-se, ne gaven nag ar gerioù, nag an doareoù-lavar am boa ezhomm evit brezhonekaat va c'hoapennad deskadurezh hag eñvorennoù. Ne vern pehini eus yezhoù bras Europa, galleg, saozneg, h.a., a c'haller deskiñ dre lenn hepken al lennegezh anezho dre ma'z eo pinvidik-dreist hag a lies seurt al lennegezh-se, graet diouzh ezhommoù ar spered, ar galon hag ar vuhez.() El lennegezh vrezhonek n'eus nemet kaozioù skuizh, kozh ravoderezh nemetken, traoù dister bet lavaret hag adlavaret mil ha mil gwezh"(6).

Ar pal a gemeras neuze Meven MORDIERN e voe ober eus ar brezhoneg ur yezh par da yezhoù bras Europa.

Kregiñ a reas, ken abred ha derou ar c'hantved, da sevel levrioù gouiziek e brezhoneg. Goulenn a reas skoazell F.VALLEE hag e 1911 e teuas er-maez kentañ levrenn an Notennoù diwar-benn ar Gelted kozh; an daouzekvet ha diwezhañ levrenn a zruas e goulou e 1924. Al levr-se a ouezoniezh (7) arnevez, an hini kentañ savet e brezhoneg, zo bepred talvoudus bras da neb a grog gant studi ar geltiegouriezh. Da heul al levr-se e teuas ingal diwar bluenn vmeven MORDIERN un niver a oberennoù a-bouez : Sketla Segobrani (1923-1925), savet e kenlabour gant VALLEE hag ERNAULT, romant doueedoniel keltiek ma paota an daveoù da holl levrioù ar mare gouestlet d'an henistor. Istor ar Bed, rummad levrioù embannet gant Gwalarn etre 1929 ha 1938, brastresadur istor an denelezh hag an holl bobloù anezhi. Prederiadennoù diwar-benn ar yezhoù hag ar brezhoneg, Gwalarn 1935-1936, a studi istor ar yezhoù, hag a venn bezañ un diazez d'an doare da ren an emgann evit ar brezhoneg. Oberennoù all Meven MORDIERN a gavor meneget



en Istor al Lennegezh Vrezhonek (1). An hini diwezhañ, embannadur dalif, zo Talar an Hoc'h, Preder 1964, ma laka ar skrivagner un diverrañ eus e vennoziou war al labour sevenadurel.

### Mennoziou Meven MORDIERN hag e levezon

Pa c'houlenn ur vro ul labour ramzel n'eo ket hepken war un dachenn met war an holl dachennoù, e rank al labourerion gentañ ober un dibab, kemer un dachenn strizh a-walc'h ha dilezel ar re all, - evit ur mare da nebeutañ. E-se, Meven MORDIERN a zilennas tachenn ar yezh : ne dremenas ket un devezh eus e vuhez gour hep degas dezhi ur binvidigezh nevez; bennozh dezhañ eo mar gellomp bremañ ren hol labour en e bezh e brezhoneg. ar Sketla Segobrani zo sellet outo evel diazez ar yezh a-vremañ. Ha kement aozadur a ra hiziv gant ar brezhoneg war dachennoù an deskadurezh, ar politikerezh, ar ouezoniezh a gav e wrizioù e labour Meven MORDIERN.

Evitañ da bleidiñ gant ar yezh hepken e fellas da vmeven MORDIERN embann e vennoziou war an tachennoù all. Evit gwir, en e vare ne oa den evit pleustriñ war an tachennoù all, war ar politikerezh, an armerzh, ar gevredigezh, ken don ha ma pleustre-eñ war ar sevenadur. An Emsav politikel a oa c'hoazh en e vugeliezh, ha rediet gant isdiorreadur ar brezhoneg da labourat e galleg. Den e-unan dre ret, hag ivez dre anien, ez embannas Meven MORDIERN mennoziou politikel ha kevredigezhel un den e-unan. Hag ar mennoziou-se a oa ken eeun ha ma oant nac'hel : fall eo ar politikerezh, pa n'o devez ar bolitikerion nepred kresket pinvidigezh sevenadurel mab-den. Evitañ e oa ar gevredigezh-skouer savet evel ur geoded a ouizieion prederiet hepken gant dizoloadennoù nevez an Natur, an henistor hag istor ar seven-

adurioù. Ha padal, e veulgan Meven MORDIERN ar broioù alouber gouest da ledañ o yezh hag o sevenadur d'ur rannved a-bezh. Pro hor bo da zistreiñ meur a wezh war ar c'hudennoù-se, ha ne vurutellimp ket amañ an tu-se eus oberenn ar skrivagner.

Pezh a chom war-lerc'h Meven MORDIERN, n'eo ket e vennozioù war ar politikerezh, pe zoken e vennozioù war ar yezh, ar sevenadur pe ar gouezoniezh, ar pezh a chom ez eo ar gevredigezh vrezhon arnevez o tiwanañ a-benn an diwezh evel frouezh d'e vloavezhiadoù labour dizenan, ha krog da ren e vuhez a gevredigezh, da lavarout eo he folitikerezh.

- 
- (1) ABEZEN, Istor Lennegezh an Amzer-Vremañ, Al Liam 1957, p. 109  
 (2) Meven MORDIERN, Talar an Hoc'h, Preder 1964, pp.18-19  
 (3) id., ibid., p.19 (4) id., ibid., p.17 (5) id., ibid., p.33 (6) id., ibid., p.33  
 (7) Gouezoniezh b., studi skiantel, skiant

~~NOTENNOU ARMERZHEL (2)~~

ARMERZH - KENTEL 4

Div rann bennañ an armerzh, pa seller ouzh ar c'henderc'h, eo ar gounezerezh hag ar greanterezh.

Ar gounezerezh, pe gounit-douar pe labour-douar, zo anezhañ ar c'henderc'hañ plant ha loened plantdebrer. Ar c'henderc'hañ loened a vez anvet c'hoazh magerezh, magañ chatal. Un den o ren gounezerezh a reer anezhañ ur gounideg, pe ul labourer douar, pe, dibaot-oc'h, ur gounezer-douar, ur gounezer; pa vez e penn un embregerezh distag, en en anver un tieg. Un embregerezh labour-douar zo un atant; un atant renet gant un tieg zo un tiegezh; ren un tiegezh zo tiekaat.

Madoù-kenderc'hañ ar gounezerezh zo : a) an douaroù hag an adeiladoù (1) tiez-annez, tiacurioù-korvoñ (2) b) ar cnatal, a dalvez d'ar bevezerezh, met ivez d'ar c'henderc'h k) an ardivinkoù. Al lodenn eus an douar a dalvez d'ar gounezerezh eo ar gwiskad-gorre, a reer anezhañ gwiskad aradus pe atil.

Daou zoare pennañ da lakaat an douar da dalvezout, - pezh a lavarer c'hoazh : da drevekaat an atiloù, - zo anezho : a) ar gounezerezh askoridik, a glask tennañ ar muiañ frouezh diouzh ar bihanañ gorread douar; b) ar gounezerezh astennidik, a glask trevekaat ar brasañ gorread gant ar bihanañ labour.

ARMERZH - KENTEL 5

E broioù 'zo ez eneber daou zoare gounezerezh: unan henvoazel, oc'h ober gant doareoù-gounit a c'hiz kozh, eleze hep kalz ardivinkoù, hep temzoù kimiek, en ur ger hep tennañ e vad eus araokadennoù ar ouezoniezh;

unan arnevez, o klask gwellaat bepred e zoareoù-labour-at dre ober gant ijinenoù niverus, temzoù kimiek, o c'houlenn o skoazell digant an aud a ouezoniezh hag ar galvezourion.

Ar plant gounezet, - ar gounezadurioù, - a c'hell talvezout d'ar bevañs : plant-bevañs, pe c'hounezadurioù boueddel, pe d'ober gwiadoù : gounezadurioù gwiadadel. Kenderc'hadoù gounezet 'zo ne vezont bevezet nemet goude bezañ bet treuzfurmet en ur greanti : an darnvuiañ eus ar gounezadurioù gwiadadel, lod eus ar gounezadurioù boueddel ( ar boetrabez-sukr da skouer); komz a reer neuze eus gounezadurioù greantel.

An askorad zo an dregantad a verk ar c'hementad kenderc'hnet dre hektar bep bloaz; lavarout a reer da skouer e sav askorad ar riz e Japan da 5 tonenn dre hektar.

*part 6*  
Hervez ar broioù e vez rannet an douar-atil e meur a zoare e-keñver perc'henniezh. Ar stad m'emañ dasparzh an douaroù etre o ferc'henned hag o labourerion a anver aoz ar glad. Kemañ aoz ar glad a vez lavaret ober adaoz ar glad. Daou zoare bras ez eus da aoz ar glad : ar berc'hentiezh Stad, ar berc'hentiezh prevez.

1. Er berc'hentiezh-Stad emañ an douaroù e perc'hentiezh ar Stad ha lakaet ganti e kerz ar c'hounideion. Ar reizhiad-se (2) anvet kengladegezh eo a ren en U.R.S.S. da skouer : 500 gounideg da nebeutañ zo bodet en un atant bras anvet kevelouri (rusianeg : kolc'hoz), en o c'herz etre 1 000 ha 8 000 hektar; etrezo emañ boutin an douar, an ardivinkou, ar chatal, ar c'henderc'hadoù.

2. Er berc'hentiezh prevez ez eo an douaroù da berc'henned prevez (tud pe gevredadoù) o gounez o-unan (korvoiñ dihanterat) pe o ro e feurm (korvoiñ hanterat).

2.1. Ar c'horvoiñ dihanterat a ren e meur a vro : Danmark, Alamagn (87,5 % eus an douaroù), Italia, Frañs, Stadoù-Unanet (64 % eus an douaroù); an atantoù a vez bihan peurliesañ hag oc'h embreger ar gounezerezh ask-oridik. Ar c'horvoiñ dihanterat zo bet ivez ur stad-tremen, e Sina da skouer, etre ar gourferc'hennerezh hag ar berc'hentiez-Stad.

2.2. Ar c'horvoiñ hanterat a ren dreist-holl e Breizh-Veur (80 % eus an douaroù), en Izelvroioù (60 %), e Belgia (66 %). Meur a stumm ez eus dezhañ hervez ment ha doare an atant, hervez doare ar feurm. An tieg a gemer un atant e feurm, pe e koumanant, a reer anezhañ ur feurmer, pe ur c'houmanantad. *c'houmanantad*

a) Ar feurmer a c'hell paeañ ur feurm divizet en araok etrezañ hag ar perc'henn; merour eo neuze, hag an atant a anver mereuri.

b) Ar feurmer a c'hell paeañ e goumanant dre reiñ d'ar perc'henn an hanter eus gwerzh e holl genderc'hadoù. Tieg war zaouhanter, pe metaer ez eo, hag an atant a anver metaeri. Ar metaerezh a vez kavet dreist-holl er broioù latin hag er Stadoù-Unanet. Dibaot eo e kreizeuropa, dianav e Breizh-Veur.

k) an tieg, perc'henn pe feurmer, a c'hell kemer e gopr implijidi anvet gwezhourion-douar, a vo :

- mevelion, mar chomont da labourat en atant a-hed bloaz;

- gwezhourion rannvloaziat, pe rannvloazidi, mar deuont da labourat e-pad <sup>*trejadowen*</sup> ur rannvloaz hepken; ar rannvloazidi o tont da c'hopr evit padelezh an eost a vez anvet gopr-estourion.

- gwezhourion devezhiat, pe devezhourion, a zeu da c'hopr diouzh an devezh hepken.

Hervez ar broioù e kemm mui pe vui an doareoù-korvoiñ ha reizhiad ar berc'hentiezh. An Argentina da skouer e ren ar gourferc'hennerezh : an atantoù, pe estancias, zo bras-edhon ha gopret e vez gant pep perc'henn un niver bras a wezhourion-douar, tra ma vez fiziet e metaerion darn eus ar parkeier. E Sualmagn e kaver er c'hontrol un niver bras a atantoù munut a c'hell a-vec'h bevañ o ferc'henned. Ar re-mañ a rank en em unaniñ d'ober kevelourioù ha kenstrollañ, - kengantañ, - o douaroù.

Ouzh ar gounezerezh e stager daou gorvoerezh all : ar c'hoataerezh pe korvoerezh ar c'hoadoù, hag ar pesketaerezh, a vez renet mui ouzh mui o daou evel ijinerezhioù.

(1) An adeiladoù zo an tiadurioù ha kement savadur 'zo.

(2) Korvoiñ a dalvez tennañ gounid eus un dra bennak; amañ ez eneber an tiez-annez ouzh an tiez-korvoiñ, da lavarout eo d'ar savadurioù a dalvez evit labour an atantoù, evel al laboù, ar staolioù, h.a.

(3) Ur reizhiad eo kement strollad elfennoù renket ~~henn~~ kenetrezo diouzh un urzh; amañ, an doare m'emañ urzhiet perc'hentiezh ha gounidigezh an douaroù.

L E N N A D E N N O U .

---

'Atav eo kentelius lenn ar c'helaouennoù a bep neuz embannet e Breizh, zoken pa 'z eo difraost a-grenn stummadur ar skrivagnerion. Kentelius, met ivez skouerius eus spered seizet tud a fell dezho komz en anv an ensav.

Lidet eo bet e meur a zoare hanter-kantved deiz-ha-bloaz emsavadeg Dulenn. Ar pennad "Embers of Easter" embannet gant Conor Cruise O'BRIEN war ur stagadenn d'an Irish Times ha troet nevez zo e galleg war ARVRO azo bet skrivet a-zivout an emsavadeg-se, ma n'eo ket en enor dezhi. Gouzout a reer e oa Conor Cruise O'Brien kannad Iwerzhon en Aozadur ar Broadoù-Unanet. Mateo gouzout ivez en deus bremañ kannad Iwerzhon kavet repu en ur skolveur amerikan evel arbennigour war gudennoù ar Trede-Beu.

A-hed pajennoù e tisleger deomp n'o doa ket emsaverion Dulenn dibabet mat o c'houlz. Gwelloc'h e vije bet dezho gortoz ar bloavezh 1918, heuliet ma vijent bet neuze gant Europa a-bezh, evel ma hete Lenin e-unan. Hag ar skrivagner da zisplegañ deomp n'he deus ket graet emsavadeg Dulenn gwalleur Iwerzhoniz hepken, met ivez hini an holl reuzeudeion en Europa, ha marteze zoken gwalleur an holl re a zo marvet e-pad an eil brezel-bed. Setu sur-mat un dezenn na vezer ket boas outi : sammañ war stourmerion Iwerzhon kiriegezh an eil brezel-bed ha se gant ur c'hannad kozh eus Iwerzhon, dilezet gantañ e vro evit ur plas mat er Stadoù-Unanet. Marteze e tiskoulmo kudennoù broioù isdiorreet an Trede-Bed gwelloc'h eget re e vro c'henedik, pezh n'eo ket

sur, met ra baouezo da damall en doare-se e vreudeur kalonekoc'h egetañ a zo chomet da stourm e-touez o fobl. Lavaromp c'hoazh en doa Lenin mennoziou resis a-zivout ar politikerezh hag e teuas a-benn d'o seveniñ e Rusia. Mennoziou kumoulek en doa ivez diwar-benn an etrevroadelezh peogwir e kemmas raktal ur wech en em gavet e penn gouarnamant Moskov betek skoulmañ diouzhtu darempredoù gant ar gouarnamantoù kevalaour, ez-resis hini London.

Goude e klasker reiñ da grediñ n'eo disheñvel ar Ouezeled diouzh ar pobloù-all nemet dre o relijion skignet dre ar bed a-bezh. Moarvat o deus ar Ouezeled un doare dezho da zisplegañ o feiz kristen, met diboell eo lavarout n'int diforc'h nemet dre ar relijion. Gouzout a reer, pezh a hegas O'Brien eo kudenn ar yezh hag ar Stad Iwerzhonat. Tud evel Tone ha Pearse ne varvont ket en aner, emezañ, met ar stad savet gant o diskibled a ziskouez o deus c'hwitet o goanagoù. Moarvat n'he deus ket Stad Iwerzhon degaset ar baradoz war an douar-mañ, pezh n'eo ket he fal, hogen roet he deus tro da Iwerzhon da vezañ ur vro adarre en-dro, arabat ankounac'haat, ha m'eo bet O'Brien e-unan e penn ar Broadoù-Unanet ez eo emichañs en abeg d'ar Stad adsavet e Iwerzhon. Ma n'eo ket bet graet pep tra duhont en deskadurezh, pezh a zo anat, piv a zo da damall, nemet ar re a dec'h dirak ar stourm evit repuiñ e goudor ar skolioù-meur estren. N'eo ket boemus stad an iwerzhoneg, met mat eo kounaat ne veie bet spi ebet ken d'ar yezh-se anez emsavadeg Dulenn hag ar Stad aisoc'net goude. Ur spi a zo bremañ e trec'ho ar yezh vroadel un deiz, en abeg da unvanidigezh ar skrivadur ha da grouidigezh ul lennegezh arnevez n'eo ket didalvoud tamm ebet. Rummadoù iwerzhonegerion a youl a zo ivez o kreskiñ e Dulenn. Ma kendalc'hont gant an hent



nevez digoret e c'hellint un deiz peuriwerzhonekaat o enezenn ha trec'hiñ da vat war ar re o deus fallgalonet en hent.

War ar gelaouenn "Breiz" niv.111 e lennomp testenn ur brezegenn displeget gant Yann GUYOMARC'H an 13 a viz Du 1966 e Pondi, e Bodadeg-Veur Kendalc'h : "Former des hommes capables de servir" pe "Stammañ tud gouest da servijout". Setu ur mennoz mat evit kregiñ. Displegañ a ra kadoriad kendalc'h perak n'eo ket deuet a-benn da lakaat an tabutoù da enanañ e diabarzh ar gevredigezh folklorik-se. Da gentañ eo bet klasket ober un emglev a-zivout aozadur ar gouelioù, o hetañ e vefe tu da astenn an emglev-se tamm ha tamm war dachennoù-all. Hag ar c'hadoriad da anzav n'eo ket deuet a-benn peogwir e kred n'emañ ket an holl a-du ma rafe berzh seurt emglev, koulskoude a-hed an hanter eus ar brezegenn e tispleg ar prezegenner arguzennoù degemeradus.

En em sevel a ra da gentañ kadoriad Kendalc'h a-enep ar re ne fell dezho nemet folkloriñ war an digarez n'eus tu da ober netra-all hervezo gant ar re yaouank. Ar re-mañ ne vezent dedennet nemet gant baleadennoù, gant evajoù ha gant ar merc'hetaerezh. Perak aheurtiñ neuze. Dansomp mat eta ha ne vo ket ken fall-se dija. Met ar c'hadoriad a c'halv a-enep an dic'hoanag-se statudoù nevez Kendalc'h votet e miz genver tremenet hag a lavar eo diazezet ar strollad war ar youl da reiñ d'ar re yaouank ur gwir spered breizhat dre studi ha pleustridigezh ar sevenadur hag an arzoù brezhon.

Met abegoù donoc'n a zo d'ar stourm emezañ : ar c'helaouennoù a bep seurt a ziskouez pegen ankenius eo dazont an armerzh. Dre-holl e klever keneiled, kerent,

maered, dileuridi ar sindikadoù hag an aozadurioù armerzhel o tamall isdiorreadur ar vro ha divroerezh ar re yaouank gouest da labourat, divarrek ma 'z int da gaout amañ ul labour dereat. Kemer a ra neuze Kendalc'h ar gwir da reiñ d'ar re yaouank ur spered breizhat, dres peogwir ez eo en abeg d'an diouer a spered breizhat eo e c'hoarvez an holl drubuilhoù meneget. Mar bije en em glevet izili Kendalc'h war ar poentoù-se abaoe 20 vloaz ne vijed ket bremañ o c'hortoz un diskoulm diouzh an diavaez d'ar c'hudennoù armerzhel pe gevredigezhel, met stummet e vije bet an dud gouest da sammañ ha da ziskoulmañ an enkadennoù-se.

Vad e ra memes tra klevout komzoù poellek a-berzh rener Kendalc'h, daoust ma 'z eo evit anzav en deus c'hwitet an aozadur-se evit lod war stummadur ar re fiziet ennañ. Pezh a zo diaes da lonkañ avat eo eil lodenn ar brezegenn. Resizañ a ra raktal kadoriad Kendalc'h n'en deus ket an aozadur-se da gemer hent an ober politikel pe armerzhel, met da gKendalc'h eo da brientiñ an dud prest da gemer an hent-se. Prientet e vo eta an dud dre gelloù-diazez an aozadur, da lavarout eo dre ar c'helc'hioù keltiek hag ar bagadoù. E pep kêr, e pep kumun e tle ar c'helc'hioù bezañ ar goell evit ar gevredigezh a-bezh, dre an intrudu war bep tachenn. N'eo ket o plediñ gant ar folklor tremenet kant vloaz zo, met dre bleidiñ gant ar folklor a-hiziv, an hini gwirion, na petra 'ta. Evit echuiñ e kinniger deomp kenderc'hel da c'hoprañ ur sekretour a greizenno aozidigezh ar gouelioù. A-hend-all emañ Breizh o vont da get araok pell, ha da heul ar folklor.

Petra soñjal a-zivout seurt arguzennoù ? Da gentañ avat e c'heller bezañ a-du gant rener Kendalc'h

pa ne fell ket dezhañ e kemerfe an aozadur-se an hent politikel war-eeun. A-du ivez evit ma vo stummet evel-ato gant Kendalc'h stoumerion evit ar vro, lakaomp. Hogen, pe stummadur a ginnig Kendalc'h reiñ d'ar re yaouank eo kiriek anezho ? Hini ebet, nemet c'hwezhañ er vombar pe er biniou. Digalonekaus eo eil lodenn prezegenn Yann Guyomarc'h eta evit nep a stourm evit Breizh. Digalonekaus ivez evit ar re yaouank a glask o hent hag a nac'her diskouez dezho an hent gwirion. Ouzhpenn ez eo digalon tamall ar re yaouank en abeg d'o diampartiz peogwir n'eo ket int a zo kablus, met ar re a fell dezho ren aozadurioù-yaouankiz e Breizh war un hent dall. Ma ne fell ket da gKendalc'h mont da get eo ret d'ar renerion diskoulmañ o dislavaroù ha diazezañ ur steuenn resis evit stummañ o re yaouank a zo a-hend-all o vont da ziflipout diganto. Ar stummadur brezhon a grog gant elfennoù istor Breizh hag istor an Emsav, ha gant diazezoù ar yezh vroadel. N'eo ket gant pennadouigoù diwar-benn darvoudigoù c'hoarvezet e Breizh e vez vez kelennet an istor, met gant welidigezh klok eus istor politikel ar vro, adalek diazezidigezh ar Vrezhoneg en Arvcrig betek an deizioù a-hiziv. Ne c'hell ket Kendalc'h padout da guzhat ouzh ar re yaouank fiziet ennañ istor an Emsav en ugentved kantved anez en em renkañ e-touez an aozadurioù a zalc'h ar Vrezhoned en deñvalijenn hag ouzer dija petra a c'hoarvezo ganto un deiz. Preder kentañ renerion Kendalc'h a zle bezañ neuze en em stummañ o-unan dre zeskiñ ar yezh hag an istor ha prientiñ ar strollad da genlabourat gant an emsavadurioù-stad emeur o tiazezañ e Breizh. Arguzet e vo vo n'eus ket tu da vont re vuan. Respontet e vo ez eo d'ar renerion da gregiñ diouzhtu gant studi ar yezh ha da zisplegañ d'ar c'helc'hioù n'eus silvidigezh ebet evit Kendalc'h en diavaez d'an hent-se. Ma n'int ket gouest da gelenn o-unan ar yezh eo dezho da c'hoprañ

kelennerion stummet (lakaomp gant Strollad an Deskadurezh Eil Derez) a raio al labour en o flas hag a raio eus ar c'helc'hioù gwir greizennoù a sevenadurezh. Ar c'helc'hioù o devo ivez na petra 'ta da zegemer e ve evezhiet al labour-kelenn gant ensellerion kefrediet. Kendalc'h a zle en em brientiñ d'ar c'henlabour evit reiñ d'ar yaouankizoù an deskadurezh vroadel o deus ar gwir da gaout. Ma ne zeu ket a-benn ar renerion d'en em glevout war ar gudenn-se eo kenkoulz dezho divodañ Kendalc'h adal-bremañ.

Liesskrivet gant ar gelaouenn

